



Demat,

Setu dekvet Priz ar Vugale, aozet gant ar gevredigezh *fea* asambles gant Keit Vimp Vev. Pevar levrig a vo kinniget d'ar vugale CE2-CM2 e-kerzh ar bloavzh-skol 2016/2017 : *Prizoniad ar gorriganed*, gant Laurence Lavand, *korriganed* a oar implij ur bellgomzer hezoug, *E kef ar wezenn velen* gant Myriam Gullevic, ur veaj varzhoniell ha dic'hortoz, *Gaza*, gant Pierre Emmanuel Marais, a gont istor ur plac'h yaouank o tont eus Palestina da vro Euskadi, ha *Tadig eizh brec'h* kontadenn Marie-Françoise Castric, evit prederiañ un tamm war dalvoudegezh ar c'hoarioù kêr ha kaer a vez profet d'ar vugale a-wechoù...



Mat e vefe deomp gouzout pet rummad pevar levr a blijfe deoc'h kaout.

Ur wech resevet al levrioù e miz Du e c'hellloc'h lenn anezho er c'hlas, en doare ma plijo deoc'h. Trugarez da gas deomp disoc'h ar votadegoù a-raok ar c'hentañ a viz Even 2017 (ur follenn votiñ 'vo kaset deoc'h e miz Mae).

Embannet e vo an disoc'hoù en ur skol e-kerzh miz Even. M'ho peus c'hoant e vefe aozet al lid-se en ho skol, kelaouit ac'hanomp. Moaien e vo deoc'h kejañ gant ar skrivagnerien ivez, evel m'eo bet graet er Faou ar bloaz-mañ. Enrollet oa bet an holl istorioù gant Sten Charbonneau, trugarez da venegiñ war ar follenn respont m'ho peus c'hoant kaout ur bladenn arc'hant (digoust), pe kentoc'h pellgargañ an enrolladenn war lec'hienn *fea* pe war hini Keit Vimp Bev. Kaset e vo deoc'h keloù dre bostel gant al liammoù.

Priz al levrioù : 15 euro ar rummad 4 levr / 10 euro ar rummad ma vez prenet unan evit pep bugel.

Profet e vo un dastumad da bep skolaer !

@ galon
Fanny Chauffin, prezidantez *fea*

FOLLENN ENSKRIVAÑ

Priz ar vugale 2017

Skol :

Skolaer(ez) e karg :

Postel :@..... Niverenn bellgomz :

Chomlec'h :

Kod post : Kêr :

Er skol e vo..... bugel o kemer perzh, rannet evel-mañ :

..... e CE2

..... e CM1

..... e CM2

Gourc'hemenn a reomp UN NEBEUD DASTUMADOÙ evit ar c'hlas : 15 euro x..... =..... euro

Gourc'hemenn a reomp UN DASTUMAD EVIT PEP BUGEL : 10 euro x..... =..... euro

Un dastumad a vo profet ouzhpenn d'ar c'helenner.

Levrioù PAV enrollet :

Pellgargañ a raomp war <http://afea.free.fr> pe <http://keit-vimp-bev.info>.

Postit ur bladenn deomp mar plij.

Graet d'a e

Sinadur :